

- 57 -

Dornskridoù Milin : Kanaouennoù

20. (LEKOMP PEP A GORNAD BUTUN...)

Lekomp pep a gornad butun
 Trai da dirai la diron lon lire
 ann amouroust zo importun
 hag evomp-ni pep a vanne
 ann eil da iec'hed egile.

unan bennak zo bet exprez
 oc'h va droug prezek d'am mestrez
 hag en deuz lavaret dezhi
 e kaven mad ann eaudevi.

.-----

C'hoaz en deuz lavaret ouспен
 e karien dour ar vinien
 ne ket he faot ma zoun goaz mad
 hag ez eo truillek va dillad.

enn eunn ti korn war ar menez
 ema va dous, va c'harantez
 abarz ann noz me he gwelo
 pe va c'halonik a vanko°

°a-us : ranno

va c'halounik ne ket manket°
 va dousik koant am euz gwelet
 va dousik koant e velann
 kousket ganthi a c'hoantaann.

°a-us : rannet

eunn noz pe ziou pa ne raen ken
 me he c'haro da virviken.
 Ann hini gousko enn noz kenta
 a rai ann eil, ann diveza
 a rai ann eil hag an trede
 ha bete'r maro goude ze

vvvvvvvvvv